

AMANN AR STERED

*Diwar « Le beurre des étoiles »
skrivet gant Paul Madec
Troet e brezhoneg gant Bob Simon*

AUTORISATION, DROITS D'AUTEURS :

Si mon texte est à disposition libre, il serait de la courtoisie la plus élémentaire de me contacter en amont de votre projet. Il n'est néanmoins pas libre de droits et est déclaré à la SACD. Il vous appartient de faire les démarches auprès de cette institution (un forfait existe pour les représentations amateurs) Je vous remercie de votre compréhension.

Paul Madec

4 rue de l'abbé Le Duc
02 90 82 03 29 / 06 86 58 40 48
pol@paulmadec.net
<http://www.paulmadec.net>

TUDENNOU

AN TAD

AR VAMM

AR VUGALE

MAMM KABELLIG-RUZ

AR KABELLIG-RUZ

AR BLEIZDROID

MARK JADOR

AR SORSEREZED

AR PRIÑSEZ CHARMANT

SUPER-BLEIZ

KOZH-TAD

PROLOG

Mamm : Da gousket bugale ! D'ho kwele bugale !

Tad : Gwalc'het ho peus ho tent ?

Ar vugale : Yaaaaaa.....!

Mamm : Graet ho peus titich ?

Ar vugale : Yaaaaaa....!

Tad : Un doudou a zo gant pep hini ac'hanoc'h ?

Ar vugale : Yaaaaaa....!

Tad : N'eo ket posupl ! Penaos an dra-se ?

Ar vugale : Peogwir eo c'hoariva !

Mamm : Mat, petra 'vo kontet deoc'h ? Gwenn-Erc'h ? Kabellig - Ruz ?
Ar Goantenn e Koad ar C'housked ?

Tad : Star Wars, an Den-Bleiz, ar Veñjer Masklet ?

Mamm : A, te neuze gant da istorioù, n'eo ket gant an dra-se e vezint sioul !

Tad : Perak ? Cheñch a raio !

Mamm : Neuze, va bugale, pehini a blijfe deoc'h ?

Ar vugale : An holl ! Ni 'n eus c'hoant klevet anezho tout !

Tad ha Mamm : Tout ? Ha ne vo ket, avat !

Ar vugale : Bouhou.....!

Tad d'e wreg : Chomomp sioul ! Mat, kae atav te gant unan, neuze.

Mamm : Ur wech e oa, hag ur wech ne oa ket, met ur wech e oa memestra, en ur vro, pell, pell ac'hann...

Tad : Just e-kichen ar blanedenn Meurzh...

Mamm : Kregiñ a ra brav !

ARVEST 1

Emañ Kabellig-Ruz o c'hoari gant e pellgomz hezoug. Ar selaouell en e zivskouarn.

Mamm Kabellig-Ruz : Dal, va aelig, kae da gas ar c'houign hag ar podadig amann-mañ d'az Kozh-Tad hag a zo klañv hag en deus ezhomm da gaout vitaminoù.

Kabellig-Ruz ne glev ket. Goude 3 gwech en aner e tenn ar vamm ar selaouell ha lavaret a ra ar frazenn ur wech ouzhpenn. K.R. n'eo ket kontant.

Mamm K.R. : Grev a zo hiziv gant ar fuzeennoù. Neuze, ar gwir 'peus da gemer velo etreplanedenn da c'hoar.

Kabellig-Ruz : An etreplanedenn ! O ya, kool !

Mamm K.R. : Ha dreist pep tra, diwall mat rak ar bleiz ha rak an dragon.

Kabellig-Ruz : Ya, ya.....

Mamm K.R. : Diwall rak an toullou du !

Kabellig-Ruz : Ya, ya, mammig, ken ar c'hentañ.

Mamm K.R. : ha rak al lastez hag al loustoni o nijal etre ar stered !

Kabellig-Ruz : Ya, ya.....

Mamm K.R. : Ha na respont james d'ar Roñfled !!!!!

Kabellig-Ruz : Yaaaa ! Ooooooo !

Mont a ra K-R kuit gant e velo etreplanedenn. Muzik Star Wars.

ARVEST 2

E ti Mark Jador

Bleizdroid : Aotrou Mark. Aotrou Mark !

Mark Jador : Petra zo, Bleiz number one ?

Bleizdroid: Kabellig-Ruz o vont war-zu ar blanedenn Kozh-Tad.
Adlavaret a ran, Kabellig-Ruz o vont war-zu ar blanedenn Kozh-Tad.

Mark Jador : Mat eo, komprenet hon eus ! Perak e lavarez pep tra div wech ?

Bleizdroid : Peogwir on bet programmet evit an dra-se. Adlavaret a ran,
Peogwir on bet programmet evit an dra-se.

Mark Jador : Ha programmet out bet ivez evit hejañ da benn hep ehan ?

Bleizdroid : Ket, ur soudeür a ra gillig din, adlavaret a ran, ur soudeür a ra gillig din.

Mark Jador : Lavaret e vo d'al labo. Mat, son ar galv !

Bleizdroid : Galvet eo skouadrennig ar sorserezed d'an degemer. Adlavaret a ran,
galvet eo skouadrennig ar sorserezed d'an degemer.

Dont a ra ar sorserezed gant o balaennoù-nij

Mark Jador : Ret eo herzel lestr-nij ar Kabellig Ruz, kousto pe gousto ! Ret eo deomp kaout ar podadig amann a zo gantañ. Ezhomm bras omp-eus anezhañ evit hon arm meur !

Sorserezed : Ar Grampouezhenn Vras !

Mark Jador : Ya ! Ar Grampouezhenn Vras ! Kit hep dale bremañ !

Sorserezed : Balaennoù majik, balaennoù majik ! Kasit ac'hanomp d'an hyperspas !

ARVEST 3

War he sunerez-nij, Ar Briñsez Charmant a zo o klask he hent en hyperspas

Priñsez Charmant : Ha, setu ! Kollet on adarre. Kazi sur 'm eus troet re abred goude al loar. Biken ne gavin va Friñs Kousket. N'eo ket aes bezañ ur briñsez charmant, me lar deoc'h !...Met, petra zo ?

K.R o zroadikellat buan, buan, ar sorserez war e-heul.

Kabellig Ruz : Biken e vin paket ganeoc'h ! Laerezed !

Sorserezed : Graet eo ganit, poultrennig !

Kouezhañ a ra ar Kabellig diouzh e velo. En em lakaat a ra ar Briñsez Charmant etrezo.

Priñsez Charmant : Paouezhit kebeded !

Sorserezed : Ar Briñsez Charmant hag he sunerez-nij !

Priñsez Charmant : Yao ! Hag unan hep sac'h ennañ ouzhpenn !

Sorserezed : Hep sac'h ! Maleür ! Tec'homp kuit !

Tec'het a reont. Mont a ra ar Briñsez Charmant da gaout Kabellig-Ruz a zo kouezhet

Priñsez Charmant : Arabat dit kaout aon ken ! Savetaet out bet ganin. Lar din 'ta, e kenkas, 'pije ket c'hoant kousket, te ?

Kabellig-Ruz : Nann, perak ?

Priñsez Charmant : Evit netra, mat eo ! Skuizh on o redek ar galaksi evit kavout ur gwaz. Rikouret 'vijen bet.

Kabellig-Ruz : Met me eo ar C'habellig-Ruz.

Priñsez Charmant : Hañ, te an hini eo ? Te eo ar mirer-amann ?

Kabellig-Ruz : Mirer petra ?

Priñsez Charmant : N'o-peus ket graet anv gant ar Grampouezhenn Vras, an arm kuzh eus Mark Jador ?

Kabellig-Ruz : Ar Grampouezhenn Vras ? A nann. Petra eo ?

Priñsez Charmant : Displegañ a rin dit ! Evit poent, chom a rin ganit, suroc'h eo. Ale, deomp war an hent !

Kabellig Ruz : Ooaaa ! Super eo da sunerez-nij !

Priñsez Charmant : Ya va faotr ! Unan hep sac'h ennañ !

Kabellig Ruz : Ooaaa !

ARVEST 4

Distro eo ar sorserezed, dipitet

Mark Jador : Neuze, petra zo c'hoarvezet ?

Sorserezed : Ar Briñsez-Charmant eo ! Unan hep sac'h ennañ he-deus !

Mark Jador : Honnezh adarre ! Hag unan hep sac'h ennañ ! Me zo 'vont da gas va arm kuzh outi !

Sorserezed : Ar Grampouezhenn Vras ?

Mark Jador : Ket ! N'eo ket prest c'hoazh. Mont a ran da c'hervel (*huchal a ra*)... Super-Bleiz !

Dont a ra S.B. gant e zilhad-splujañ, palmoù, maskl ha tuba

Sorserezed : Super-Bleiz ? Ou la la !!!

Super-Bleiz : Salud merc'hed !

Sorserezed : Salud Super-Bleiz !

Mark Jador : Super-Bleiz ! Gant peseurt gwiskamant emañ aze ?

Super-Bleiz : E vakañsoù e oan pa 'poa galvet ac'hanon, Chef. A vec'h ma 'm eus bet amzer da lakaat va c'hap.

Mark Jador : Pebezh bandennad ! Selaou mat ganin ! Adarre emañ ar Briñsez Charmant o strobañ ac'hanomp. Kae betek ti Kozh-Tad, gra he stal dezhi ha degas ar podadig amann !

Super-Bleiz : Grrrr ! Emaon o vont d'ober bleud gant he eskern hag ur sac'h biniou gant he c'hroc'hen.

Mark Jador (*o huchal adarre*) : Degasit din an arm kuzh emañ.

Super-Bleiz : Ar Grampouezhenn Vras ?

Mark Jador : Naaaannnn !

Bleizdroid : (*un aval a zo gantañ en e zorn*) Arm kuzh degaset, adlavaret a ran, arm kuzh degaset.

Super-Bleiz : Met, un aval eo ?

Mark Jador : Ket, un arm spontus eo. Deus, displegañ a rin dit.

ARVEST 5

E ti Kozh-Tad. O pellgomz emañ

Kozh-Tad : Alo ? Mont a ra va merc'h ? Piv ? A, nann, n'emañ ket emañ c'hoazh... Ur c'houign hag ur podadig amann ? Adarre ? Met re a

golesterol 'meus dija !

Unan bennak o seniñ

Gortoz, unan bennak a zo ouzh an nor ... Deuit tre !

Super-Bleiz : Demat ! Degas a ran deoc'h pred an Ti-Kêr.

Kozh-Tad : Alo, va merc'hig, hennezh eo adarre, an imobil a vleiz-se. Gervel a rin ac'hanout en-dro.

Super-Bleiz : Debrit gant yec'hed, Aotrou.

Reiñ a ra ar plad da Gozh-Tad, gwelet a ra an aval

Kozh-Tad : Un aval ! Mat, biskoazh kemend-all, gwashoc'h gwashañ !

Super-Bleiz : Ar c'heginer a zo gant e RTT.

Unan bennak o seniñ

Kozh-Tad : Va mab-bihan eo, kredapl.

Super-Bleiz : Din-me da c'hoari.

Kabellig-Ruz : Demat deoc'h Kozh-Tad. *Gwelet a ra Super-Bleiz hag e palmoù.* O, na bras eo ho treid !

Priñsez Charmant : Super-Bleiz ! Te, emañ !

Super-Bleiz : Anavezet he deus ac'hanon !

Priñsez Charmant : Hore ! Emaout din ! Diwall bremañ, loen fall !

Super-Bleiz : 'Mañ graet ganez, Priñsez villiget !

Tennañ a reont o sabrenn-lazer.

Kozh-Tad : A sav ! Sioul bremañ ! Echu bremañ ho-taou ! Echu diouzhtu pe reiñ a rin deoc'h ur roustad d'an eil hag eben ! Te, ran barvek, petra 'peus c'hoant ?

Super-Bleiz : Ma... An amann !

Kozh-Tad : Met kemer da amann, 'ta ! N'hellan ket ken debriñ amann gant ar medisin.

Super-Bleiz : Trugarez, Kozh-Tad, ra vezo an nerzh ganez !

Mont a ra kuit

Kozh-Tad : Mat eo, mat eo ! Ale, raoust, er maez, ha buan ! Tribledie !

Mont a ra kuit Super-Bleiz.

An dra-se 'neus roet naon din bremañ, se. Un aval bihan, mat kenañ eo evit ar pezh am eus !

Kregiñ a ra en aval ha menel a ra kousket

Kabellig-Ruz : Petra c'hoarvez gantañ ?... O, kousket eo !

Priñsez Charmant : Kousket eo ?

Kabellig-Ruz : Dihun anezhañ 'ta !

Priñsez Charmant : Petra ?

Kabellig-Ruz : Ro ar pok dezhañ.

Priñsez Charmant : Ar pok ? O, ne roin ket, alato !

Eus an a-dreñv e vez klevet an holl o youc'hal

An holl : Ar pok ! Ar pok ! Ar pok ! Ar pok !

Priñsez Charmant : Pffff ! *Pokañ a ra dezhañ ha kouezhañ a ra kousket.*

E zivskoaz e sav ar Kabellig Ruz. Kemer a ra diouzh e sac'h ar c'houign-amann hag e pellgomz hezoug. Mont a ra da azezañ ha kregiñ a ra da c'hoari en ur zebriñ ar c'houign.

EPILOG

Tad : ... Ha setu penaos e timezas Mark Jador gant Mamm Kabellig-Ruz, ha leun a gouignoù a rejont.

Mamm : Met sot penn-da-benn eo da istor !

Tad : Marteze, met kousket int da nebeutañ !

Mamm : Deomp kuit hep trouz !

Tad : Lazh ar gouloù...

Ar Vugale : Ket ! Arabat lazhañ ar gouloù !

Tad ha Mamm : O, nannnnnnn.....

ECHU

© PAUL MADEC / BOB SIMON